



Kinnig labour

-

Rener·ez Kelenn Kreizenn stummañ

Kelenn eo kreizenn stummañ pedagogiezh ar c'hevread Diwan, lec'hiet e Kemper. Framm distag diouzh Diwan en un doare lezennel, ennañ e vez kinniget stummadurioù kentañ ha dibaouez kelennerien (kentañ hag eil derez) ar c'hevread mui stummadurioù war ar yezh e brezhoneg evit danvez tud a-vicher ar c'helenn divyezhek.

Dindan gevat gant an INSPE Breizh ha skolioù meur e vez kinniget ar Master MEEF e Kelenn evit ar c'helenn divyezhek dre soubidigezh ha gant se e vez kaset war-raok ar c'helenn e brezhoneg.

Evel kreizenn stummañ ar c'hevread Diwan ez euz liammoù kreñv etre obererezhioù Kelenn ha mont en-dro, ezhommoù hag emdroadurioù ar c'hevread. Dre ma 'z eo ken stank an darempredoù etre an daou emsavadur ez eus ezhomm da anavezout pizh Diwan, e zibarded, e skipailhoù hag e aozadur.

E darempred ingal emañ renerezh ar greizenn gant atebien pedagogiezh ar c'hentañ hag an eil derez, dreist-holl war daeoù ar stummadur kentañ ha dibaouez. En em harpañ a ra war ur rouedad dek heñcher·ez dazparzhet etre ar c'hentañ hag an eil derez. Kenurzhañ anezho a zo ul lodenn eus ar post evel termeniñ ha kemer e kont an ezhommoù stummañ er c'hevread.

Ne glot ket ar garg renerezh gant ul leun amzer. Neuze e kemer ar rener·ez perzh e framm ar Master MEEF.

Dindan atebegezh kuzul merañ ar gevredigezh Kelenn emañ kargoù ar rener·ez hag e laka e pleustr an henchadurioù divizet gantañ.

Er greizenn e voc'h e karg da sevel, aozañ, leviañ obererezhioù stummañ mui kenurzhañ hollek an obererezh.

1. Sevel ha leviañ pedagogiezh

Dielfennañ an ezhommoù stummañ, dreist-holl evit ar stummadur dibaouez
Azasaat hag heuliañ ar stignadoù stummañ (Master, stummadur e brezhoneg)
Sevel, steuñviñ, lakaat e pleustr ha priziañ oberoù stummañ

2. Aozadur ar stummadurioù

Sevel ar c'hevratoù
Klask ar stajidi
Heuliañ an hentadoù stummañ
Evezhiañ pedagogiezh

3. Merañ ha kenurzhiañ ar greizenn

Klask ha sterniañ ar stummerien ha stummerezed
Merañ ar c'hoskor ha ren ar skipailhoù (melestradurezh ha pedagogiezh)
Sevel ha heuliañ ar budjed, sevel ar goulennoù yalc'hadoù hag ar bilañs arc'hant
Merañ an dafar ha termeniñ prizioù
Heuliañ kalite an oberoù stummañ ha gwarantiñ ma vo adnevezet an testeniekadur QUALIOP
Skridaozañ an danevelloù obererezh
Adneveziñ ar c'hretadennoù : DCL, RNCP, CPF

4. Kehentiñ ha diorren

Lakaat e pleustr ar c'hehentiñ diabarzh ha diavaez
Aozañ oberoù klask ha tuta evit ar stajidi
Diorren ha derc'hel kevelerezhioù emsavadurel ha micherel gant frammoù evel an INSPE, an ISLRF, ar Rektorelezh,
ar C'huzul rannvro, kêr Gemper
E framm an diorren emamp o c'hortoz digant ar rener pe ar renerez e rafe kinnigoù war emdroadur liesseurted
ar stummadurioù kinniget, kenkoulz war lec'hioù ha doareoù ar stummadurioù hag an enklask a dud nevez evito

5. Kefridiou boutin Diwan - Kelenn

Ambroug ha priziañ ar g-c'h-elennerien-ezed skol hag ar stajidi
Klask ha heuliañ heñcherien ha heñcherezed
Reiñ e lod evit sevel ar steuñv stummañ dibaouez (kelennerien-ezed 1añ, eil ha vakataerien)
Kemer perzh e aozadur an emvodoù meur ha kollokoù an ISLRF (emsavadur uhel yezhoù republik Bro C'hall)

6. Buheziñ ha stummadurioù

Evit bezañ reizh, buheziñ abadennoù stummañ (tro-dro 250 eur/bloaz), dreist-holl war an deskiñ, anavezout ar reizhiad desavererezh ha hentadoù ar skolidi

Doare den

Barrek e brezhoneg (live C1 dre skrid ha dre gomz)
Anavezout mat ar reizhiad desavererezh hag ar programmoù
Barregezhioù e ijinouriezh pedagogiezh hag en deskiñ
Mestroniañ binvioù urzhiataerezh (bureveg, Odoo)
Gouiziekl war merañ ar budjed hag ar c'hontoù
Barregezhioù aozañ, kenurzhiañ, ren
Bezañ gouest da gas emvodoù, emgavioù ha da labourat en ur skipailh
Bezañ gouest da skridaozañ ha da zielfennañ

Evit priziañ ar g-c'h-elennerien-ezed skol ez eoc'h betek diazezadurioù ar c'hevread hag e rankoc'h neuze kaout un anaoudegezh pizh eus mont en-dro an diazezadurioù hag ar skipailhoù.

Perzhioù

Perzhioù daremprediñ
Emren hag azasadusted
Bezañ pizh ha barrek da aozañ

Titouroù all

Padelezh labour : leun amzer

Lec'h labour : Kemper

Dilec'hiañ : ingal war Breizh a-bezh (5 departamant) hag e Bro C'hall a-wechoù

Gopr ha statud : diouzh doare den an emstriver-ez

Deiziad an emgavioù tuta : 21 a viz Mae 2026

Ma'z oc'h dedennet gant ar post, trugarez da gas hoc'h emstrivadur a-raok an 13/05/2026 (CV + lizher emginnig e brezhoneg hag e galleg) da renerzh@kelenn.bzh



Offre d'emploi

-

Directeur·rice de Kelenn Centre de formation

Kelenn est le centre de formation pédagogique de la Fédération Diwan, situé à Quimper. Structure juridiquement autonome de Diwan, il assure la formation initiale et continue des professeur·es (1er et second degré) de la fédération, ainsi que des formations linguistiques en breton destinées aux futur·es professionnel·les de l'enseignement bilingue.

Conventionné avec l'INSPE de Bretagne et des universités, Kelenn prépare notamment au Master MEEF pour l'enseignement bilingue immersif et contribue au développement de l'enseignement en langue bretonne.

En tant que centre de formation de la Fédération Diwan, l'activité de Kelenn est étroitement liée au fonctionnement, aux besoins et aux évolutions de la fédération. Cette proximité implique une connaissance fine de Diwan, de ses spécificités, de ses équipes et de son organisation.

La direction du centre travaille en lien constant avec les responsables pédagogiques du 1er et du 2nd degré, notamment sur les enjeux de formation initiale et continue. Elle s'appuie également sur un réseau d'environ dix tuteurs et tutrices, réparti·es entre le 1er et le 2nd degré. Leur coordination fait partie intégrante du poste, au même titre que l'identification et la prise en compte des besoins en formation au sein de la fédération.

La fonction de direction ne correspond pas à un temps plein. À ce titre, la directrice ou le directeur intervient également dans le cadre du Master MEEF.

La direction exerce ses fonctions sous l'autorité du bureau et du conseil d'administration de l'association Kelenn et participe à la mise en œuvre de ses orientations.

Au sein du centre, vous assurerez la conception, l'organisation et le pilotage des actions de formation, ainsi que la coordination globale de l'activité.

1. Élaboration et pilotage pédagogique

Analyse des besoins en formation, notamment en formation continue

Adaptation et suivi des dispositifs de formation (Master, formation longue en langue bretonne)

Conception, planification, mise en œuvre et évaluation des actions de formation

2. Organisation des formations

Élaboration des conventions

Recrutement des stagiaires

Suivi des parcours de formation

Veille pédagogique

3. Gestion et coordination du centre

Recrutement et encadrement des formateurs et formatrices
Gestion des ressources humaines et animation des équipes (administrative et pédagogique)
Élaboration et suivi du budget, montage des demandes de subventions et bilans financiers
Gestion des moyens matériels et définition de la tarification
Suivi de la qualité des actions de formation et assurer le renouvellement de la certification QUALIOP
Rédaction des rapports d'activité
Renouvellement des accréditations : DCL, RNCP, CPF

4. Communication et développement

Mise en œuvre de la communication interne et externe
Organisation des actions de prospection et de recrutement de stagiaires
Développement et entretien des partenariats institutionnels et professionnels avec des structures telles que INSPE, ISLRF, Rectorat, Conseil Régional, commune de Quimper
Dans le cadre du développement, il est attendu de la directrice ou du directeur qu'elle ou il soit force de proposition dans l'évolution et la diversification de l'offre de formation, tant dans le choix des lieux et modalités des formations que dans la recherche potentielle de nouveaux publics

5. Missions communes Diwan – Kelenn

Accompagnement et évaluation des professeurs-es et stagiaires
Recrutement et suivi des tuteurs et tutrices
Contribution à l'élaboration du plan de formation continue (professeurs-es 1^{er}, 2nd et vacataires)
Participer à l'organisation des assemblées générales et colloques de l'ISLRF (Institut Supérieur des Langues de la République Française)

6. Animation de formations

Idéalement, animation de sessions de formation (environ 250 heures par an), notamment en didactique, connaissance du système éducatif et parcours des élèves

Profil recherché

Maîtrise du breton (niveau C1 à l'écrit et à l'oral)
Bonne connaissance du système éducatif et des programmes
Compétences en ingénierie pédagogique et en didactique
Maîtrise des outils informatiques (bureautique, Odo) o
Connaissances en gestion budgétaire et comptabilité
Capacités d'organisation, de coordination et de management
Aptitude à conduire des réunions, des entretiens et à travailler en équipe
Capacités rédactionnelles et d'analyse

Dans le cadre des évaluations de professeurs-es, vous vous rendrez dans les différents établissements de la fédération et devrez ainsi avoir une connaissance précise du fonctionnement des établissements et des équipes

Qualités personnelles

Sens relationnel
Autonomie et adaptabilité
Rigueur et capacité d'organisation

Autres informations

Durée du travail : Temps plein

Lieu de travail : Quimper

Déplacement : régulier sur toute la Bretagne (5 départements) et ponctuellement au niveau national

Salaire et statut : en fonction du profil du·e la candidat·e

Date des entretiens d'embauche : 21 mai 2026

Si vous êtes intéressé·e par le poste, merci de transmettre votre candidature avant le 13/05/2026 (CV + Lettre de motivation en breton et en français) à renezh@kelenn.bzh